



E-kreiz an noz

Skrivet gant : Youenn Gwernig

E kreiz an noz me glev an avel
o vlejal war lein an ti

Diskañ :
Avel, avelig c'hwezit 'ta
al lann 'n em gann ha d'an daoulamm
kanit buan kan ar frankiz deomp-ni

Diouzh ar reter e c'hwezh an avel
o vlejal war lein an ti

Diouzh ar c'hornog e c'hwezh an avel
o vlejal war lein an ti

Diouzh an douar e c'hwezh an avel
o vlejal war lein an ti

Diouzh ar mor bras e c'hwezh an avel
o vlejal war lein an ti

Ne vern pe du e c'hwezh an avel
brav eo bevañ 'barzh hon ti